




TALABAO

AR GAZETENN A RA TROUZ!

DIELL: **BZZZZHHH!!!**



Un amprevan
roueel, ibil
mel!



~A.S. 87 + Kove Kofok Boude D. AN BOUTET

P. 21



P. 26



Niverenn 2
 Miz Meurzh 1987

Pep hini ac'hanomp a oar penaos serrañ
 e c'henoù, met nebeut a oar pegoulz!

TAOLENN

3	BOUDIG AN TREDAN
13	BZZZZHHH!
21	DIVIZ ETRE DAOU VUGEL HAG ATEPOMARDS
24	MERZIN EO MA ANV DIN-ME
26	AR ROUAÑEZ MAEVE HAG AN TARV ROUS
29	C'HOARIOU HEGASUS
30	KORN AR C'HWEN

D'HOL LENNERTEN

Siwazh! Mil gwech siwazh! Ur bern viou-koukouz hag un nebeud faziou a zo chomet war ma lerc'h e-barzh Nni TALABAO! Ho rigarez a c'houlennan amañ, me eo da damall evit kement-se! Taolet 'vo pled ne zovfe ket mui hor mignon ar goukouz war ho pajennoù...

TARZHIC

HO LIZHIRI

Digant Koupaia KERVELLA (Dijon/Bro-C'hall)

Demat, TALABAO

Abaoe pell e c'hortozen ur gelaouenn vrezhonek evel Talabao. Laouen on. Ar pezh en deus plijet din ar muiañ a zo an holl bennadoù diwar-benn an tan, hag ar c'hoarioù da c'houde.

Plijout a rafe din dielloù diwar-benn loened (kezeg) pe broioù.

Kenavo ha trugarez da dTalabao!

Koupaia

TALABAO: kavout a rit en niverenn-mañ un diell diwar-benn loened: ar gwenan. Lakaet e vo un diell diwar-benn ar c'hezeg war ar stern a-benn nebeut. Emañ hor soñj ivez kinnig dielloù a-stivout broioù estren, ne chom nemet dibab ar vro gentañ!

Trugrekaat a reomp an Ao. D. COTEL, eus Argenteuil (Bro-C'hall) evit e lizher ken hegarat en deus roet kalon deomp.

Bec'h dezhi!!

KEMENADENN

STAJ GOUREN DRE AR BREZHONEG
 18-19 a viz Ebrel

Ar staj-mañ a vo koulz evit an deraouidi hag evit ar re a oar gouren. Kaset e vo e TI AR GOUREN, e BERRIEN (29).

Krog e vo a-benn ar Sadorn 18 da 15e hag ez echuo d'ar Sul 19 e-tro 17e. Roll oberiantizoù an daou zevezh-mañ a denno da gement-mañ:

- displegañ dre vras petra eo ar gouren
 - deraouidi gant ar gouren
 - displegañ petra eo ar gourenoù keltiek
 - pleustriañ war istor ar gouren hag all.
- Labouret 'vo gant filmoù, pleustret 'vo kement war ar pallenn hag e diabarzh ur sal.

PRIZ AR STAJ: 100 L (bod ha predoù; degasit ur sac'h kousket). TI AR GOUREN, Ar poullig, 29218 BERRIEN. Pgz 98.99.99.44

BOUDIG AN TREDAN



O klask dor sal ar c'hentelioù breshoneg ez eo degouezhet hor mignoned d'ur c'hev m'emañ ur voudig iaktis o fardañ tredan. Saveteet eo bet (sañset) ar voudig gant unan eus ar vandennad, ha setu e vo sevenet e vrasañ c'hoant gant boudig an tredan evit e drugarekaat...



Paskal AR MARC'HEG












BZZZZHHH!

C'hwek eo ar mel, ha poanlus ar flemm.
 Abaoe milvedoù e vevont tost deomp,
 ha nebeut ac'hanomp a anavez anezho...

AR GWENAN


E-barzh ruskennoù an hini e vev ar gwenan a ra an den war o zro. Tro ho peus bet da welet moarvat, ouzh tor un duchenn pe en ul liorz, ar seurt tie-zouigoù bilhan-se, fraoñv forzh pegement, en-dro dezho gant monedone an amprevaned-se. Gouennoù gwenan gouez a zo ivez. Ar re-se a vez fardet o lojeiz ganto un tamm forzh pelec'h: gwelet e vint a-wechoù o tont er-maez eus ur frailh en ur voger gozh pe eus ur gleuzenn bennak. Met pell-pell 'zo en deus desket mab-den ober war-dro ar gwenan, ha ma ne c'heller ket ober loened doñv anezho, e c'heller da vihanañ lavaret e kennevont gant an den: en o reiñ bod dezho e-barzh ruskennoù savet gantañ hag o kemer diganto ul lodenn eus ar mel a reont. Met an den eo an hini a rank ober diouzh ar gwenan ha neket an eneb, rak ar gwenan, i n'o deus ket kemmet tra en o buhez abaoe milvedoù ha milvedoù! Evit gwir ez eo ar gwenan an amprevaned nemeto a zo "donvaet" gant an den, abalamour da zaou zanvez ne c'hell ket kavout a-hend-all: ar c'hoar hag ar mel.

Un amprevan eo ar wenanenn, eus urzh ar c'heneskelleged da lavaret eo o deus divaskell e kroc'hen. An anv skiantel a roer d'an amprevan-se eo *Apis mellifera*. Gell-rous ha blevek eo kof ar wenanenn hag er penn anezhañ ez eus ur flemm ha n'eo ket brav bezañ broudet gantañ. Ober a ra ar gwenan gant ar flemm-se p'o devez d'en em gannañ pe d'en em zifenn. Hogen ar wenanenn he devo bet flemmet a zo tonket dezhi mer-vel, rak he flemm a chomo sanket e korf an enebour, dalc'het gant ar barvennoù a zo outañ.




Ar gwenan, evel ar merien, a vev en ur gevredigezh urzhiet mat. Lod gwenan gouez avat, a vev en o unan en natur.


AR RUSKENNOÙ



Ruskenn savet gant kef ur wezenn



Ruskenn savet gant plouz



Ruskenn tiretennek. Gwellet a reer an tiretennoù a-lec'h ma vez savet o bruskennoù-koar gant an gwenan.

Meur a anv a roer d'an tiezouigoù a farder d'ar gwenan: binenn, binot, kestenn, koloenn, kelevenn, plebouch... Moarvat diouzh ar stumm o devez? Ober a raimp-ni amañ gant ar ger ruskenn.

Pa oa bet kroget mab-den da welet pe-seurt mad a c'hellfe tennañ diouzh ar gwenan, en deus klasket reiñ bod dezho, evit o miret tost dezhañ. E-pad pell amzer n'en deus bet graet nemet troc'hañ ar c'hefiou gwez a oa gwenan enno hag o degas gantañ. Setu petra oa doare ar ruskennou kentañ. Tamm-ha-tamm eo bet gwellaet an traoù. Henegiptiz a raë gant lestroù pri. Gresianed ha Romaned a save o ruskennou gant plenk pe ober a raent gant podoù pri ivez. C'hoazh en hon amzer e c'heller gwelet meur a seurt ruskennou o vont a vro da vro.

E Breizh, n'eus ket c'hoazh pell 'zo, e raed gant ruskennou plouz, evel m'en diskouez "kolo" e-barzh ar ger "koloenn". Gant plouz segal e veze graet dre ma 'z int hiroc'h ha gwevoc'h eget ar plouz all. Kordet e vezent ha gwriet kenetrezo gant plusk drein. Ne reer mui hiziv an deiz gant ar ruskennou plouze, rak diaes e oant da embreger pa veze deuet ar mare da dennañ ar mel. Lod gwenanerien ha ne ouient ket ober mod all a ranke neuze lazhañ o gwenan. De- viñ a raent bizhier soufr ouzh toull ar ruskenn hag ar maged diwarno a lazhe an amprevaned. Ur gwir zismantr a oa bep tro, hag ur c'holl bras, hep kontañ ar gaou a raed d'an natur. Se a oa ken sot ha lazhañ ur yar da gaout he vioù diouti!

Ober a reer bremañ gant ruskennou tiretennek. Lem-laka eo an tiretennoù enno hag ar gwenan a sav o bruskennoù-koar en o stern. Evel-se e c'hell ar gwenaner o divelañ hep lazhañ e wenan ha, p'en devez c'hoant, e c'hell e-veshaat gwelloc'h ouzh buhez ha yec'hed e ruskennad.


AR VUHEZ ER RUSKENN

"Palez al labour urzhiet mat ha kempenn" a c'hellfed envel ar ruskenn. En dia-barzh e ra pep gwenanenn he labour ha merket-strizh eo he c'hefridi da bep hini. Bez' e c'hell bezañ aes a-walc'h betek 80 000 gwenanenn pe ouzhpenn en ur ruskenn.


TRI SEURT GWENAN A ZO

E penn ar ruskennad hag o ren warni emañ ar vamm-wenan. Ne vez nemet ur vamm e pep ruskenn. He labour eo dozviñ. Ne ra nemet se! En hañv, pa vez kaer, e c'hell ur vamm dozviñ aes tremen 3000 vi bemdez! Gwashañ tra, pa vez lañset mat ar vamm da zozviñ, d'ar mare ma vez kreñv ar mel, ne c'hell ket dere'hel war he vioù, ha dont a reont diouti, koulz lavaret bep tregont eilenn.

Ar vamm a zo aes da anavezout diouzh ar re all: kalz brasoc'h eget ar gwenan all eo hag ur c'hof hir he deus. Hi eo ar penn, ha mar deu dezhi mervel, ez eo tonket d'ar ruskennad a-bezh mervel ivez da heul. Ar gwenaner, mar gwel ez eo marvet ar vamm en ur ruskenn, a glas-ko enlakaat ur vamm nevez enni, met diaes-kenañ eo rak alies ne vo ket deuet-mat gant ar gwenan all hag he lazhañ a raint. A-wechoù e teuo an taol da vat. Pa varv ar vamm e c'hell ivez gwenan all en em lakaat da zozviñ, met ne zeu nemet pared diwar o vioù, hag ar re-se a zo didalvez, evel ma vo gwelet pelloc'h.



AR VAMM-WENAN
A ZO BRASOC'H EGET
AR GWENAN ALL.
HIR EO HE C'HOF.




UN TAD-GWENAN
BRAS-TRE EO E ZAOU-
LAGAD. KARREZEK EO
E GOF.

Bez' emañ ivez eta ar pared, a anver an tadoù-gwenan. N'o deus ket a flemm, setu n'int ket danjerus. O labour dezho eo speriañ ar vamm. Ar paradur a vo a-tav graet en aer, diwar nij, ha neket er ruskenn, morse. An nijadenn-dimeziñ a reer eus se. Ne vo nemet un nebeud tadoù hag a zeuio a-benn d'en em barañ gant ar vamm ha da speriañ anezhi. Mervel a raint kerkent avat, rak o benvegad-embarañ a vo diframmet diouto hag a chomo sanket e korf ar vamm. An tadoù all n'o deus ket kavet d'en em barañ gant mamm ebet a vevo er ruskenn, bouetaet d'ober netra gant ar gwenan all, hag o vont war o goar evel ma karont, o kemm ruskenn a-wechoù zoken. Met pa vo erru fin an deizioù brav e vo un

ton all: argaset e vint didruez diouzh ar ruskennou, ha mar klaskont dont tre en-dro, e vint lazhet gant ar gwenan all. Neuze ez eo tonket dezho mervel er-maez gant an naon hag ar riv... Ur finvezh kriz eo, met ne c'hell ket ar ruskennad kenderc'hel da vevañ lezireien na reont mann ebet hag a zebr, ouzhpenn-se, teir gwech muioc'h eget ar gwenan all! Bevañ a rafent diwargoust ar re all e-pad ar goañv pa ranko ar ruskennad en em vagañ gant ar pourveziou mel dastumet en hañv. Setu ne vev ket gwall bell an tadoù-gwenan: eus an nevez-hañv betek an dilost-hañv.



Ar re niverusañ eus ar gwenan eo al labourerezed. Labour ar rumm-se a zo ul laz evit gwir rak n'eo devez tamm paouez ebet morse. Naetaat ar ruskenn, boueta ar preñvedenned, sevel bruskennoù-koar nevez, difenn digor ar ruskenn ouzh an enebourien - gwesped pe gwenan estren - reoliañ ar wrez diabarzh: eleze en em zivaskellañ par ma c'hellont pa vez re domm an amzer rak teuziñ a c'hellfe ar c'hoar ha neuze mogañ ar gwenan. Evel-se e vez dalc'het ur wrez etre er ruskenn. Met al lahusañ eo ar bleuniaoua, da lavaret eo mont da bikotañ ar bleunioù evit dastum pollen ha nektar diwarno. Gant-se eo berrik a-walc'h buhez al labourerezed, un nebeud sizhunvezhiou hepken, ha c'hoazh e rankint diwall da vezañ plomet gant ul labous bennak. Ar re a vo bet ganet war lost an diskar-amzer a vevo hiroc'h amzer avat, rak tremen a raint ar goañv er ruskenn betek an nevez-amzer.



UL LABOUREZED AR WENANENN NEMETI A WELOT O VLEUNIAOUA.

Ar mammoù-gwenan a vev aes a-walc'h betek pevar pe pemp bloaz, met adal an trede bloavezh e vezont kozh ha n'int ket koulz da zozviñ rak diwar o viou e tinod muioc'h a tadoù eget a labourerezed, ar pezh n'eo ket spletus. Neuze e lavarer eo **disec'h** ar vamm.

Er goañv e chom ar gwenan gorjet en ur bloc'had en-dro d'o mamm, hep ken labour da ober nemet kefluskiñ kigennoù o bruska evit produiñ ar wrez ret dezho da vevañ, war-dro 15°C. Adalek miz Genver pe miz C'hwevrer ec'h adkrog tamm-ha-tamm ar vuhez er ruskenn. Krog eo ar vamm da zozviñ war ur gorread bihan da gentañ, oc'h ober he mad eus gwrez ar bloc'had gwenan. War lost miz Meurzh, mar bez kaer, e c'hellho ar gwenaner ober e weladenn gentañ.



DIABARZH AR RUSKENN


Diabarzh ar ruskenn a zo graet gant bruskennoù-koar a vez anvet ivez **terennou pe follennoù-koar**. Er ruskennou-tiretennek e sav ar gwenan o bruskennoù e stern an tiretennoù. En natur en o savont evel na c'hellont, diouzh stumm al lec'h o deus kavet da annezañ. Ar c'hoar a zo un danvez bouk a vez fardet gant ar gwenan o-unan. Debrñ a reont kalz a vel ha treuzfurm et vez ganto e koar gant gwagrennoù o deus dindan o c'hof. Er c'hoar-se e vez stummet toullouigoù gant ar gwenan: ar c'hevigoù. Ur souezh pegen reoliek eo savadur ar c'hevigoù, c'hwec'hkornek int holl. E-barzh lod anezho e vez gorroet o fourveziou mel gant ar gwenan. E-barzh ar re all e vez lakaet ar viou bet dozvet gant ar vamm.

EUS AR VI D'AN AMPREVAN

Ur wech m'eo bet dozvet ar vi gant ar vamm e vez lakaet en ur c'hevig gant al labourerezed hag a vez dalc'het en-dro dezhi, bec'h warno gant o labour. Ret e vo gortoz war-dro 24 devezh a-barzh ma teuio ar viig-se da vezañ ur wenanenn. Un treuzfurmatur sebezus eo. Sellit ouzh ar skeudenn amañ e-kichen: goude tri devezh e teuio ur **breñvedenn** diouzh ar vi. Bec'h spontus e vo adal neuze war al labourerezed evit boueta ar preñvedenned, traoù marlonk ma 'z int! E tro mil gwech bemdez e rankont reiñ boued dezho! Er penn kentañ e vezont gant **livrizhenn**, da lavaret eo "yaourt" fardet evito. Goude seizh devezh e vo roet dezho ur seurt yod, graet gant mel, pollen ha dour. D'an dekvet devezh ez eo echu ar boueta. Stanket e vez war ar c'hevigoù gant ur gwiskad koar tanav. Dont a ra ar breñvedenn da vezañ ur **rakvil**. Hag a-benn ar fin, erru un ugent devezh bennak, e teuio an amprevan peurstummet er-maez eus e gevig, pare da adkavout ar re all.

E traoñ ar bruskennoù e weler kevigoù hag a zo un tamm brasoc'h ha kromm ar gwiskad koar warno. Er re-se eo bet lakaet ar viou a c'hano an tadoù diwarno. Un ugent devezh bennak e vezont ivez a-raok dont da amprevaned. War kostez ar ruskenn ez eus ivez kevigoù disheñvel, stummet un tammig evel beskenn ar mez: ar re-mañ a zo savet da zegemer ar viou a zeulo da vezañ mammoù.

Ar preñvedenned a zeulo diwar ar viou-se a vo maget gant livrizhenn hepken. Se a zo kaoz dezho da zont brasoc'h eget ar gwenan all. 16 devezh hepken e vez ar re-se o tont. Ar stroll eus ar c'hevigoù-se, leun pep hini anezho gant ur vi, ur breñvedenn pe ur rakvil a vez anvet ar **goradur**.



AN HEDOU

Adalek miz Mae e krog ar gwenan da vezañ re niverus en o ruskenn. Ret e vo da lod mont kuit. Met ne c'hellont ket mont kuit evel-se: ur vamm o deus ezhomm da vont ganto, anez e varvfent holl. Setu perak e vez savet mammoù nevez er ruskenn d'ar mare-se. Hogen, mar dinod re abred ar mammoù yaouank, e vint lazhet kerkent gant ar vamm-wenan gozh. Neuze e vez kendalc'het da stankañ war kevigoù ar mammoù nevez betek ma vo aet kuit ar vamm-wenan gozh, ganti ul lodenn vat eus ar ruskennad, gwenan kozh ha yaouank mesk-ha-mesk. Neuze, ar vamm a zeuio da gentañ eus he c'hevig a lazho ar re all hag a reno war ar ruskennad skañvaet.

Hag ar re a zo aet kuit? Ar re-se a zo nijet kuit da heul ar vamm-wenan gozh hag emaint holl en ur bloc'had. Ur gwir voulenn traoù bev ha trouzus. Ned eont ket da bell avat. En em skour-rañ a reont ouzh ur barr en ur wezenn dost, da c'hortoz kavout bod en ur gleuzenn pe en un toull bennak d'en em zi-azezañ. Neuze ne flemm ket ar gwenan, rak debret o deus o gwalc'h a vel a-raok mont en o zro, o c'houzout ervat o defe bruskennoù nevez da sevel.

Ar bloc'hadou gwenan-se o nijal a vez anvet hedou. Un hed-gwenan a lavarer, pe c'hoazh ur barr-gwenan, un taol-gwenan. Pa vez aet kuit ul lodenn eus ar ruskennad evel-se e vez lavaret o deus ar gwenan taolet o hed.

Gortozet gant mall e vez ar mare-se gant ar wenerien, ha war evezh e vezont. C'hwiñañ a c'hellfent war un hed! Prientiñ a reont ruskennoù nevez evit dastum an hedou. Ned eo ket diaes dastum un hed: trawalc'h eo kemer ar vamm en dorn hag en em zastum a ra an holl wenan en-dro dezhi. Evel-se e c'heller dougen un hed-gwenan a-benn brec'h! Diouzh ar mare ma vez taolet, e c'hell bezañ betek 10 lur a bouez e-barzh un hed-gwenan, 5 Kg! Lod wenerien, evit fougasiñ, a laka ar vamm war o elgez, ha setu an holl wenan o 'n em skourrañ outi hag oc'h ober evel-se ur pezh mell barv d'an den! Estlammus a-walc'h eo da welet. Ar mammoù o deus ur flemm ivez, met ne flemmont ket an dud. Ober a reont gant o flemm hepken p'o devez devez d'en em gannañ a-enep mammoù all.

An hed, ur wech ma vo bet lakaet en ur ruskenn nevez, a grogo da labourat. En em vodañ a raio al labourerezed ha berañ a raio ar c'hoar eus o c'hofoù. Setu peadra da fardañ bruskennoù nevez ha kevigoù prest da zegemer ar viou. Ne chom mui nemet d'ar vamm kregiñ gant he dozved.

Meur a hed a vez taolet bep bloaz. Betek tri peurliesañ. An hini kentañ a anver ar c'henthed, an eil an tarvhed hag an trede al losthed. A-wechoù e c'hell bezañ ur pevare hini, un dra rouez eo hag ober a reer anezhañ ar-c'hanthed, dre ma ne oad ket engortoz anezhañ ha ma teuo arc'hant diwarnañ!



AR BLEUNIAOUA

Piv n'en deus ket gwelet ur wenenenn o vont a vleunienn da vleunienn, un devezh kaer hag heoliek en nevez-hañv? O brasañ labour eo hemañ: bleuniaoua. Dastum a reont diwar ar bleunioù kement o deus ezhomm da vezañ.


Ar pollen, anvet ivez bleud-bleuñv, a zo un doare poultr a vez dastumet ganto diwar goafioù ar bleunioù. E liv a zo diouzh liv ar bleunioù ma vez bet dastumet. Kaset e vez gant ar gwenan e-barzh godelloù bihan o deus ouzh o faviou a-dreñv. Alies e vezont gwelet o nijal pounner, karget-barr o faviou a-dreñv gant boulouigoù melen, glas pe melen-ruz. Ar pollen eo boued ar gwenan hag an tadoù. Mont a ra ivez da ober yod ar preñvedenned.

Ar propoliz: hemañ a zo un danvez pegus a vez dastumet diwar broñsoù ar gwez. Talvezout a ra d'ar gwenan da induñ diabarzh o ruskenn hag ivez da stankañ ar gremoù a c'hell digeriñ enni.

Dour a vez dastumet ivez gant ar gwenan, da derriñ o sec'hed evel-just, ha da aozañ boued ar preñvedenned.

Loened ijinus-kenañ eo ar gwenan ha pa vez bet dizoloet gant unan bennak anezho ul lec'h dreist da vleuniaoua, ez eo gouest hounnezh da "lavaret" d'he c'henseurtezed e pelec'h emañ ar plas he deus kavet. Un doare dañs a ra, evel un 8 pladet - sellit ouzh ar skeudenn; ha diouzh pegeit e pad an dañs hag an tizh a vez gant ar wenenenn e kompren ar re all pegen pell ha war peseurt tu emañ al lec'h burzhudus! Kement-mañ a zo bet dizoloet gant ar gouizieg alaman Karl von Frisch.

Ur perzh all a bouez bras en deus ar bleuniaoua e kempouez an natur: o vont a vleunienn da vleunienn e ro an tu ar gwenan d'ar bleunioù d'en em speriañ ha da reiñ deomp bleunioù ha frouezh nevez ha niverus bep bloaz. Ar pollenadur e vez anvet an dra-se. Da lavaret eo e vez kaset gant ar gwenan pollen dastumet ganto diwar goafioù ar bleunioù pared betek spegoù ar bleunioù pared. Hep ar gwenan hag an aprevedan all bleuniaouerien ne vefe nemet an avel oc'h ober al labour-se hag ar pep brasañ eus ar pollen a vefe kollet en aer, ha seul nebutoc'h a verzh-mat a rafe ar bleunioù.



Abn nebeud gerioù...



- DOZVED** (ak.g.): diwar ar verb dozviñ, labour an dozviñ.
- GOAF-ioù** (ak.g.): amañ, benvegad reizhel ar bleunioù pared.
- GOANVIN** (av): tremen ar goafiv.
- GORAD-où** (ak.g.): kevigoù leuniet gant vioù, preñvedenned pe rakviled.
- GORJAÑ** (av): en em vodañ, en em zastum en ur bern.
- LEM-LAKA** (ag.): a c'heller lemel ha lakaat pa 'vez c'hoant.
- MELUS** (ag.): plantoù pe louzeier melus eo reoù a ya ar gwenan warno evit bleuniaoua.
- SPEG-où** (ak.g.): benvegad reizhel ar bleunioù pareded.

SELAOUIT 'TA! SELAOUIT 'TA! SELAOUIT 'TA! SELAOUIT 'TA! SELAOUIT 'TA! SELAOUIT



AN NIVERENN A ZEU A VO KOMZET ENNI
A-ZIVOUT LABOUR AR WENANERIE!
ME EO A ZISPLEGO AN TRAOU DEOC'H,
RAK UR MAILH A ZO AC'HANON
EVIT AR PEZH A SELL OZH AN
AMPREVANED HEGARAT-SE!

Ur sell war HON ISTOR

UN DIVIZ

ETRE DAOU VUGEL
HAG ATEPOMAROS, BREZELOUR KELT

Er bloavezh 215 a-raok Jezuz-Krist emañ, da lavaret eo 2200 vloaz 'zo. Distroet eo ATEPOMAROS d'ar gêr goude bezañ bet aet da vrezeliñ da bell vro. EUDONOS ha BREGATA, daou vugel eus e veuriad un tu bennak en Aremorika, a zo deuet d'e gaout evit ma kontfe dezho e daolioù kaer.


Un veuriad a zo ur boblad tud renet gant ar memes den hag a soñj dezho ez int diskennidi ar memes hendad. **Aremorika**, deuet da vesañ Arvorig, a oa ar veezh d'ar mare-se.

- BREGATA** : - Betek penn pellañ ar bed oc'h bet, Atepomaros?
- ATEPOMAROS** : - Gwelet em eus ar pevar mor.
- BREGATA** : - Pevar mor a zo?
- ATEPOMAROS** : - Ya, hini ar C'hornôg eo hon hini. Bez' emañ ivez hini an Hanternoz ha hini ar C'hreisteiz, ha hini ar Reter pe ar Sav-Heol, ha Kelted a zo etrezo o-fevar.

D'ar mare-se e oa ar Kelted o ren war lodenn greiz Europa evel m'en diskoues ar gartennig amañ gindan:



- KELTED
- ROMANED
- GERMANED
- GRESIANED
- SITED



Atepomaros
Brezelour kelt



EUDONOS : - Bet out bet betek ar vro ma sav an heol?
ATEPOMAROS : - Marc'hekaet em eus etrezek an tu-se. Un hir a veaj e gwirionez: koadoù ha koadoù c'hoazh a-hed an hent, menezioù o tilec'hiañ en diabell, an eil plaenenn o tont war-lerc'h eben ha stêrioù ledan harz ebet d'o redadenn nemet du-hont mor ar Sav-Heol.
EUDONOS : - Eno e sav an heol?
ATEPOMAROS : - O, ne ra ket! Pelloc'h emañ c'hoazh al lec'h ma sav!
BREGATA : - Tud a zo eno ivez, Atepomaros, ha bugale evelomp?
ATEPOMAROS : - Tud e-giz emañ: kouerien o turiañ douar, kemenerien o fardañ dilhadoù ha goved o teuziñ houarn, hag ar vrezelourien evelomp-me o tifenn anezho holl...
EUDONOS : - Brezeliet ho peus kalz, Atepomaros?
ATEPOMAROS : - Hag em eus! Duzh ar C'hermaned hag ar Romaned, ouzh ar Sited hag ar C'hresianed. Stourmet em eus war droad, stourmet em eus war varc'h. Diwar garr-argad on aet d'en em gannañ ivez. Dispont e vezemp war an dachenn-emgann gant hor goafioù, hor c'hlezeier houarn hag hor skoedoù aozilh pe lêrgoad. Tec'hout a rae an enebourien dirazomp!
Mont a rae ar vrezelourien gelt betek an dachenn-vrezel gant kirri bihan, anvet kirri-argad, bep a varc'h staget outo ha bep a vlenier ouzh o c'hae. Diskenn o rae neuze ar vrezelourien d'en em gannañ. Pa veze ret tec'hout e pignet en-dro er c'harr-argad ha tizh dezhi.
EUDONOS : - Petra 'zo deuet ganeoc'h eus ar broioù-hont, Atepomaros?
ATEPOMAROS : - Sellit ouzh ar pezhioù-mañ! Pezhioù arc'hant ez int. Tennet e vez an danvez arc'hant diouzh ar mengleuzioù: lakaet e vez da deuziñ ha savet pezhioù gantañ.
BREGATA : - Bravigoù int, evit en em fichañ?
ATEPOMAROS : - N'int ket! Talvezout a reont da baeañ ar pezh a brenit. Er broioù-hont ne vez ket graet gant barenigoù houarn ha kouevr evel ma resp-ni emañ.
BREGATA : - Ha gouest e vefec'h da brenañ din ur bizoù gant ho pezhioù arc'hant, Atepomaros?...

Deut da vezañ... ur Strobineller Bras!!



Penaos lakaat un tamm sukr da zeviñ

Kemerit un direnn ha lakait an tan war un tamm sukr: teuziñ a raio, ha dont a raio da vezañ ur c'hozh tamm sukr devet. ... Nul! Gwelloc'h eo lakaat ludu warnañ evit ma tevfe gant ur flammenn c'hlas vray!



An alumetezenn hud

Tanit un alumetezenn, lazhit anezhi, strakit anezhi ha kregiñ a raio an tan enni adarre! E gwirionez ez eo ret deoc'h implij un alumetezenn prientet en a-raok. Kemerit daou ibiltan, troc'hit anezho dre o c'hreiz, ha pegit daou damm asambles da fardañ un alumetezenn daoubennek! Ur sigotadenn vray, ha piv a welo eil penn an ibil?



SETU HAG A ZO
DIV WECH MARC'HADMATOCH!

Ar pezh moneiz

Lakait ur pezh moneiz da valirañ war ur voest alumetez, ha plantit un alumetezenn sonn er voest. Lakait un ibil-tan all war ar pezh moneiz, e benn a-stok ouzh an alumetezenn gentañ. Klaskit bremañ tennañ ar pezh moneiz kuit hep ste-kiñ ouzh an div alumetezenn!

Netra aesoc'h! Tanit an div alumetezenn: penn an eil a bego ouzh penn eben, an eil alumetezenn a savo diwar ar pezh moneiz, ha setu graet an taol!




Ar voestad alumetez

Kengalvit holl gazetennerien ar bed, ha diskouezit dezho ur voestad alumetez hanter-leun, en ur zigeriñ an daou du anezhi. Serrit ar voest, c'hwezhit warni en ur zistogañ ho karm-hud muiañ-karet, fiñvit ar voest: trouz ebet! Ur souezh evit TALABAO! Digorit ar voest: ne gouezh ket an alumetez! Gouillo eo! Penaos?

Torret ho poa un ibil-tan en a-raok, dezhañ da gemer ledander ar voest. Lakait ho ibil-hud e-kreiz ar voest,

dezhañ da viret ouzh an alumetez all a fiñval hag a gouezhañ. Hor gourc'hemennoù!



DANEVELL

TABUT A SAVAS etre Maeve, rouanez Bro-gConnacht, hag he gwaz Aillil a-zivout ar madoù degaset gant pep hini anezho evit o dimeziñ. Evit ma vije sklaer an traoù e kontjont o holl deñ-zorioù, bravigoù, dilhadoù hag o holl loened, kezeg, deñved ha moc'h.

Ar rouanez Maeve hag an tarv rous

Kement ha kement a vadoù a oa bet degaset gant an eil hag egile war-bouez un tarv, un tarv da Aillil, anvet Findebennach. Ne oa nemet un tarv en Iwerzhon par da Findebennach: un tarv rous, Donn Cúailnge, a oa da zDaire Mac Fiachna en Ulster. Setu ma kasas Maeve kannaded da c'houlenn digantañ prestañ dezhi Donn Cúailnge e-pad ur bloavezh, o lavaret e roje dezhañ kalz a zouarou ha kalz a enorioù roueel ma teuje eñ e-unan da zegas an tarv dezhi.

Laouen-tre e oa Daire gant ar c'hinnig. Met en noz-se, e voe klevet dre laer gant e vevel unan eus ar kannaded o fougeal penaos he dije ar rouanez kaset un arme da gemer an tarv dre nerzh ma n'en dije ket asantet prestañ dezhi e loen. Ar mevel en doa adlavaret da zDaire, hag a oa aet e fulor, kaset kuit kannaded ar rouanez o reiñ dezho da c'houzout ne brestje ket e darv.

Ar rouanez a fuloras hag a zivizas ober brezel d'an Ulster. Aillil a lavaras e tisonje o zabut ha mont ganti



Troet diwar ar saozneg gant Gwenoel HUON


gant armeoù all deuet eus Iwerzhon a-bezh da sikour ganto. Ober a rejont brezel ha lakaat ar skrap war ar vro betek dezho en em gavout dirak Cú Chulain, ar gwellañ brezelour.

Buan-ha-buan e tibenne Cú Chulain an holl re en galve d'an emgann, hag ur wech, evit gourdruez Maeve, e skoas ur maen gant un tenn ken resis ma lazhas al labous doñv a oa war skoaz ar rouanez.

Kement eus ar gwellañ brezelourien a von lazhet gant Cú Chulain, ma tivizas ar rouanez kas Ferdia a-enep dezhañ. O-daou e oant mignoned a-vihanik ha desket o doa an deareoù d'en em gannañ digant ar memes mestr.

Kerseet e voe Cú Chulain pa welas Ferdia o tostaat en tu pellañ d'ar roudou. E-pad ur mare e tivizjont diwar-benn o envorenoù bugeliezh hogen a-benn ar fin e oa deuet ar c'houlz d'en em gannañ...

E-pad ar mintinvezh a-bezh e tassenas en aer trouz ar saezhoù hag ar goafioù ha stokadennoù ar c'hlezeier. Met ken prim e oant o-daou gant o skoedoù, ma ne voe tizhet hini ebet anezho. En em gannañ a rejont neuze gant goafioù, hag ar wech-mañ e tivas ar gwad. Da guzh-heol e lakajont o armeoù a-gostez hag en em vriatajont. En noz-se e voe degaset plant ha geotenoù da gCú Chulain da bareañ e c'houlzioù ha kas a reas ar memes louzoù da gamp Ferdia en tu all d'ar roudou. En noz-se ivez e voe degaset boued da Ferdia ha kas a reas an hanter en tu all d'ar roudou da gCú Chulain. Da c'houlz-deiz o devoe c'hoazh emgav er roudou. Brezeliañ a rejont an devezh-pad ha da guzh-heol, berr-anal ha gwad-holl, en em vriata a rejont adarre. Adarre e kasas Cú Chulain plant ha geotenoù da Ferdia, hag adarre e kasas Ferdia boued ha died da gCú Chulain.



Skedennet gant Alan DIPODE (C'hoazh?!)

D'an trede deiz en em gannjont gant o c'hlezeier poumner ha d'ar pevare deiz, o skedoù stok-a-stok, e voe ken kalet ar c'hrogad ma voe disec'her ar stêr, kement e strinke an douar. En diwezhañ ez implijas Cû Chulain ar c'hleze tregont barvenn dir lemm er beg anezhañ, anvet Gabulga, ha ne c'heller e lemel eus korf an enebour nemet en ur zidro-c'hañ e gorf a dammoù. Cû Chulain en kemeras etre e vizied hag en bannas gant kement a nerzh ma sankas e korf Ferdia ha mervel a reas hemañ, ouzh treid Cû Chulain.

Gouelañ a reas dourek dirak korf e vignon. Neuze e voe kaset pelloc'h da bareañ e c'houlloù e dourioù burzhudus ha da ziskuiñhañ da adkemer e nerzh.

Kenderc'hel a reas ar brezel ha Donn Cûailnge a voe paket, ha kaset d'ar c'hreisteiz e bro Maeve. Goude meur a stourm a-enep tud bro-Ulster, e tistroas Maeve hag he armeoù d'ar gêr, o heul-liañ an tarv rous, mail warno e velet oc'h en em gannañ a-enep Findebennach.

An daou darv a oa tal-ouzh-tal. Kement o doa turiet an douar m'o doa toullet ribouloù don er prad. Ruz e oa o daoulagad ha blejal ha yudal a raent gant trouz ar gurun. Neuze en am dajjont penn-ouzh-penn oc'h en em doull-gofañ hag o tiwadañ, ken e ruzie an douar. Kenderc'hel a reas an emgann e-pad an noz. En em gannañ a raent a-dreuz da Iwerzhon a daolioù kerniel.

Da c'houlloù-deiz e welas Maeve, Ail-lil hag o soudarded an tarv rous Donn Cûailnge o tostaat en dremwel ha gantañ tammoù eus korf Findebennach ouzh e gerniel. Hejañ a rae e benn o stre-wiñ tammoù an tarv lazhet e pep korn eus Iwerzhon.

Neuze e skoas etrezek an hanternoz hag e reas tro ar vro en ur yudal hag en ur dourtañ kement ha kement ma tarzhas e galon en e vruched, hag e kouezhas e gorf divent war an douar.

Neuze o devoe Maeve hag Ailil kement a vadoù an eil hag egile...




C'hoarioù hegasus

Gant **MARTIAL**.

AR GERIOÙ-DIRI

O tegas ul lizherenn nevez da bep bazenn en ur ziskenn hag adrenkañ an holl lizherennoù diouzh ret e kavot ur ger nevez. Da skouer: I - Vi - Liv - live...



1. Pennrann ar verb mont
2. Ger-mell
3. War ar porzh
4. Legumaj anavezet mat e Bro-Leon
5. Digalon
6. Plant ar stêrioù
7. Paotr an deskadurezh

ME 'VELO BOT GET AN DRA-MAÑ !!



AL LIZHERENN-SIL, PE AR SILIZHERENN

Ul lizherenn (deoc'h d'he c'havout!) o kemer lec'h ul lizherenn all en ur ger, a ra ur ger all. Da skouer, mar kemeromp ar ger PELL ha mar silan U em bo ar ger PEUL, hag e chomo ganin an L. An L-se, mar rankan e silañ er ger DRE a rolo din DLE met en em gavout a rin neuze gant un R a silin er ger BUOC'H ha setu graet ar ger BROC'H, ha me oc'h adkavout an U am boa silet er ger kentañ. U e oa ar silizherenn, ul lizherenn hag a oa en em silet evel ur silienn-lizherenn! Klaskit ober bremañ: bez' ho peus da zibab etre an teir silizherenn-mañ: O, P, L.

Ar silizherenn

<input type="checkbox"/> a gas MERENN da vezañ [] [] [] [] [] hag a lez ganin []	<input type="checkbox"/> a gas DOR da vezañ [] [] [] hag a lez ganin []	<input type="checkbox"/> a gas LEFAN da vezañ [] [] [] [] [] hag a lez ganin []	<input type="checkbox"/> a gas PORZH da vezañ [] [] [] [] [] hag a lez ganin [] hag a oa ar silizherenn!
--	---	---	--

KORN AR C'HWEN

Un deiziadur

Savet ez eus bet ar roll-urshioù-mañ da vont en-dro gant ar voulerer **TROMSON PR90-800** he anv, hogen bez' e c'heller implij ur voulerer all!
 Pouezet war ar stokell **STOP** ma fell deoc'h dero'hel ar roll-urshioù a-sav evit ur mare.

Evit mont e-maez eus ar roll-urshioù: pouezet war **CWT C**.
 Skrivit **CLOSE** a-raok implij ar voulerer adarre, mod all e teuto ur fast "Fiechennaueg dale'het a'hoazh".

Mat eo ar deiziadur-mañ adal ar bloavezh **1983** betek an adreishadur a vo a-benn ur nebeud kantvedoù. Embannet e vo ur reizhadenn gant **TALABAO** d'ar mare-se.

```

0 '=====
1 DEIZIADUR PER AR STEUNV/TALABAO
2 '=====
3 OPEN"O",#1,"SCRN:"
4 OPEN"O",#2,"LPRT:(80)"
5 SCREEN 4,6,6
6 CLEAR,1-DIMMS(12),WS(7)
7 DATA GENVER,C'HWEVREH,MEURZH,EBEL,MAE,MEZHEVEN,GOUERE,EOST,GWENGOLO,HERE,
  DU,KERZU,SUL,LUN,MEURZH,MERC'HER,YAOU,GWENER,SADORN
8 FOR X=1 TO 12: READ MS(X):NEXT X
9 FOR X=1 TO 7: READ WS(X):NEXT X
100 '=====
101 CLS:PRINT "M/S MAR PLIJ?":XS=INPUT$(1)
102 P=1:IF XS="M" THEN P=2:CLS:PRINT "N'EMAN KET AR VOULEREZ WAR ELUN":PRINT
  #P,CHR$(24);CHR$(27);CHR$(72):REM PR90-600 PICA CORRESPONDANCE
103 CLS:INPUT "BLOAVEZH MAR PLIJ",A:IF A<1983 THEN GOTO 103
104 GOSUB 1300:REM =====
105 PRINT#P:PRINT#P
106 FOR X=0 TO 7:FOR Y=160 TO 192:IF POINT(Y,X)>0 THEN PRINT #P,TAB(Y-157);
  "#";
107 NEXT Y:NEXT X
108 PRINT#P:PRINT#P
109 GOSUB 1300:REM =====
110 FORM=1 TO 12
111 PRINT#P:H=M:GOSUB 1000:K2=YB+1
112 H=M+1:GOSUB 1000:K1=YB+1
113 N=K1-K2:IF N>=0 THEN L=28+N:GOTO 115
114 L=35+N
115 IF M=12 THEN L=31
116 PRINT#P
117 PRINT#P,TAB(19-(LEN(MS(M))+5)/2)MS(M);A
118 PRINT#P
119 PRINT#P," ";FOR N=1 TO 7:PRINT#P," ";LEFT$(WS(N),3);" ";T=T+4:NEXT N:
  PRINT#P
120 T=0:IF K2=0 THEN GOTO 122
121 FOR N=2 TO K2:PRINT#P," ";T=T+5:NEXT N
122 FOR N=1 TO L:T=T+5
123 PRINT#P,USING"#####";N;
124 IF T=35 THEN T=0:PRINT#P
    
```



(STLENNATAEREZH)

Per ar STEUNV

```

125 NEXT N:PRINT#P
126 IF T<>0 THEN PRINT#P
127 GOSUB 1300:REM =====
128 NEXT M
129 CLOSE:PRINT "POUEZIT WAR UR STOKELL":XS=INPUT$(1):RUN
1000 '=====
1001 X=A:N=M-3;J=12:GOSUB 1200:MM=Z
1002 IF MM>0 THEN X=X-1
1003 N=X;J=400:GOSUB 1200:X=Z
1004 X=INT(X/4);X1=INT(X/100)
1005 KY=X-X1
1006 N=MM;J=5:GOSUB 1200:M2=Z
1007 M5=INT(MM/5);M2=INT(M2/2)
1008 N=M2;J=2:GOSUB 1200
1009 KM=13*M5+5*M2+3*Z
1010 N=KY+KM+3;J=7:GOSUB 1200:YB=Z
1011 RETURN
1200 '=====
1201 K=INT(N/J)
1202 Z=N-K*J
1203 IF Z<0 THEN Z=Z+J
1204 RETURN
1300 '=====
1301 FOR Z=1 TO 39:PRINT#P,"=";NEXT Z
1302 RETURN
1303 '=====
    
```



RESPONT da vMona BAUDET (Perroz-Gireg)

An urzh **SCREEN** a vez implijet evit kemañ al livioù.
 Gant an urzh **DEFGRS()** e vez divizet lizherennoù nevez ha n'emaint ket dis-
 kouezet war an douchennaueg.
 Implijet e vez an urzh **BOXF** da dresañ un hirgarrezenn.
 Trugarez evit ho lizher ken hegarat!

Skrivit deomp ho evezhiadennoù hag ho alioù d'usar-benn **KORN AR C'HWEN!** Komzit
 t'uea n'ho peus memnoshoù a-sivout rolloù-urshioù nevez; bez' e c'hellit kas
 deomp ho rolloù-urshioù deoc'h-c'hozi, adal ma n'int ket bet embannet gant ur ja-
 zetenn all! En niverenn a zeu e vo ur roll-urshioù tost-tre d'hor yeak.
 Kenavo, ha nebeut a lodad en ho urshiaterezh!

Per ar STEUNV

DISKOULM AR C'HOARIOU

Gერიუ-დიри: A - AL - KAL - KAOL - LAOSK - RAOSKL - SKOLAER

AR SILIZHERENN: P (PERENN, MOR, LEDAN, FORZH). Diaes. n'eo ket?

Savet eo bet maketenn an niverenn-mañ gant Alan DIPODE.

En niverenn a zeu



AR WENANERÏEN

...Nann! Ar wenanerien ne fardont ket hon amprevaned muiañ-karet! Ober a reont war o zro, ar pezh a zo ur gwir labour, evel ma vo displeget deoc'h gant Martial ha Tarzhig. Ur mell labour eo, e gwirionez!

*
**

Un istr a-reuz

Daoust hag-eñ e vo kavet ur pok a zereo d'al louanez?...

Un istr a-reuz gant Marivon BERR (renez CHOLORI a lenn Talabao ivez, c'hwi 'oar!).

*
**



Unan all a oa re
vuan a chome
war zek he foenn

C'HOARI: kargit ar baperenn amañ-dindan, pe adskrivit anezhi, ha marteze e viot koumanantet mar kasit ur chekenn 100L da dTalabao! Dreist! Plijadur!

Ma c'houmanantiñ a reot da dTALABAO pa c'hourc'hemennan! Ra bado ar c'houmanant:

1 bloavezh (100L) 1 bloavezh, koumanant skoazell (adalek 130L)

ANV _____ Anv bihan _____

Chomlec'h _____

_____ Kêr _____

Amañ lakaet ma chekenn a _____ Lur gall, en anv AN HERE.

KOUMANANTIT!



TALABAO, embannet gant AN HERE, 16 straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho koumanant da dTALABAO, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 100 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 130 L. Koumanant evit ar broioù estren: 130 L. Chekenn da vezañ leuniet en anv AN HERE. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Meurzh 1987. Lezenn c'hall 49.956 ar 16-7-49. Lakaet er moul e ti gKloitr, mouler e Sant-Tonan, 29220 LANDERNE. © AN HERE 1987.